

YF_0006_Ar Butun

Ar butun a zo keret, abalamour d'ar peizant
Rak an Aotrou a vez dalc'hmad o klask kaoud an arc'hant.

An arc'hant a vez gantañ hag an oll blijaduriou,
Betek feurmo voeturiou d'o c'has d'an ofisou.

Pa n'erruaint e-barz ar bourk, mont a raint da vale,
Mont a raint e-barz an iliz, asamblez gand ar c'hure.

Mont a raint e-barzh ar c'hoer, asamblez gand ar beleg,
Doue a vez lost an iliz, e-mesk ar beizanted,

Doue a vez lost an iliz, e-mesk ar beizanted
O selaou o 'fedennou, hag o 'fennou kaled.

O selaou o 'fedennou, ha memez o c'hlemmou,
Doue 'ra ket kalz a gas, evit gweled an Aotrou.

Pa vez erru an Aotrou, e-toull an ostaleri,
Neuze e vez gouveet eus a biou a vez anveet.

An Aotrou a vez saludet, laret dezañ dont d'an ti,
Med ar paour kaezh peizant, a vez laosket evel ur c'hi.

An Aotrou a vez saludet, diwisket gand an tog,
Med ar paour kaezh peizant, a vez laosket dont war-raog.

Pa vez erru mare lein, ez a an Aotrou en kampr
Eur fourchedenn deuz e dorn, loaïou kaer en arc'hant.

Med ar paour kaezh peizant ez a da blas al loened,
Chom eno e-pad an deiz, gand an naon hag ar sec'hed.

M'am-bije bet un tamm butun da lakaad ur c'horniad,
Troughonno lostiou ar zaout, ha goulenn pegement.

P'am-be lakaet ur c'horniad, ha sachet ur vogedenn,
Ha neuze, a gave din, e oen un den evit biken.

Setu micher ar peizant, evit gounid e damm boued,
Ober war dro e brajou ha lakaad kalz a ed.

M'am-eus drouklaret un dra, etre ma frajelite,
C'houlant eskus gand an dud, ha pardon digand Doue.

Kanet gand Yann Fanch Kemener, Barzaz.